

Brudañ an divyezhegezh



Kelaouiñ an dud ha reiñ dezho c'hoant da skoliata o bugale en hentadoù divyezhek, setu pal ur c'houlzad brudañ a vo kroget e-kreiz miz Mae. Skritelloù bras a vo gwelet e kêrioù zo eus Breizh.



Sant bodad Kuzul Sevenadurel Breizh ar c'helenn eo bet kaset ar raktres-se war-raok. Er bodad-se e kaver Diwan, Div Yezh, Dihun, Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg (UGB) ha Deskiñ d'an Oadourien (DAO). “Ar c'helenn brezhoneg zo deuet mat bremañ gant lodenn vrasañ Breizhiz” eme Alan ar Gal, prezidant ar bodad. “Daoust da-se n'eus ket ouzhpenn 5 % eus bugale Breizh-Izel skoliataet en un hentad divyezhek. Gellout a rafe bezañ gwelloc'h” emezañ. E-tro 10 400 bugel a ra gant ar brezhoneg er skol hiziv, war pemp departamant Breizh, evit ur 500 post kelenner leun-amzer bennak. Divizet o deus izili ar bodad klask broudañ an dud da enskrivañ o bugale en hentadoù divyezhek an abretañ ar gwellañ “evit profitañ ar muiañ posupl eus perzhioù mat an divyezhegezh abred.”

KRESKIÑ AN NIVER A VUGALE...

Ur c'houlzad kelaouiñ boutin d'an tri hentad divyezhek a vo. Skritelloù bras (12 m²

ha 4 m²) a vo skignet e-kerzh div sizhunvezh diwezhañ miz Mae. E kumunioù Breizh e-lec'h ma 'z eus eus un hentad divyezhek c'hoazh e vint gwelet, da lavarret eo war-dro 110. “Evit kreñvaat ar skolioù zo dioute c'hoazh”. Bruderezh a vo ivez er c'hazetennoù pemdeziek. “Tu zo da dizhout un daou vilion bennak a dud er vro evel-se” eme Alan ar Gal. Tri miz arao an distro-skol, se roio un tamm amzer evit an dud da brederiañ er skol e-lec'h ma enskrivent o bugale.

...HAG A GELENNERIEN

Un eil pal zo gant ar c'houlzad : broudañ tud zo da vont da gelenner war ar brezhoneg pe dre ar brezhoneg. An ezhommoù evit gellout skoliata 20 000 bugel divyezhek evel m'en deus embannet ar C'huzul-rannvro klask ober : “50 post kelenner a vefe ret krouiñ bep bloaz d'an nebeutañ” eme Alan ar Gal. Dibab ar vicher-se zo ivez dibab bevañ er vro. Skritelloù savet gant tud a vicher zo bet dibabet gant ar bodad hag a gloto gant an daou vennoz-se (s.o. ar skeudennoù).

Ur skoazell a 30 000 euro zo bet roet gant Kuzul-rannvro Breizh evit ar raktres-se. Ranket o deus izili ar bodad klask arc'hant ouzhpenn e lec'h all evit kas an traoù war-raok. Kevredigezhioù, embregerezhioù ha tud o deus kaset ur gweneg bennak neuze. 50 000 euro zo bet dastumet evel-se.

M.L.



Ul lodenn eus izili ar bodad kelenn KSB : Yannig Baron (Dihun), Pol Molac (Div Yezh) hag Alan ar Gall (e penn ar bodad).

Tu zo da genderc'hel da skoazellañ ar c'houlzad kelaouiñ : Kuzul Sevenadurel Breizh, 7 straed jeneral Guillaudot, 35069 Roazhon Cedex (menegiñ “koulzad kelaouiñ”).